

*Kenned ee
Jelou, Zevn*

AR SIBOER BURZUDUZ
alaouret gant Hor Zalver.

mae

Var don : *Jesu, dulcis memoria.*

1902

1.

Selaouit eun histor kavet
Vareurskrid-dournemeuzlennet,
Selaouit histor eur siboer
Bet alaouret gant Hor Zalver.

2.

Ar burzud-man zo digouezet
Epad an Dispac'h milliget,
Pa ioa dre holl en hor bro gez
Brezel spountuz ha lazerez.

3.

Gant aoun ne ve an hosti zakr
Profanet gant an dud fallakr,
Pëtra ra eur belek santel ?
Klask dezhi eur guziadell.

4.

Laket eo 'n'eur siboer kristal,
Varnhan siel ar presbytal ;
Goude, gant ar brassa resped,
N'eun toull en douar eo kuzet.

5.

Deuet ar peoc'h... Buhan ez ær
Da glask gant fizians ar siboer ;
O kaera burzud da velet !
Ar siboer a zo alaouret !

6.

Evelse 'plijas gant Jezuz
Diskouez he c'halloud burzuduz...
Ar guisk aour-ze var ar siboer
A veler c'hoaz en hon amzer.

7.

An traou-zen'int ket eur gonchen ;
Ar virionez int penn da benn.
O na plijout a ra d'in-me
Kenteliou mad an histor-ze.

8.

O Jezuz, va c'haloun, siouaz !
'Vel ar siboer zo paour ha noaz...
Ah ! grit eur burzud evithi :
Plijet ganeoc'h he alaouri !

9.

Modesti hag humilite,
Pasianted, dousder ive,
Setu, o Sakramant divin,
D'am c'haloun an aour a fell d'in.

10.

Ar siboer a lezas Doue
D'hen alaouri 'vel ma kare...
Va ene ganthan alaouret
A goll, siouaz ! he holl c'hened...

11.

O Jezuz, a-vreman fidel,
Ne fell d'in mui o tilezel ;
Tenzor ho kras a roit d'in,
Ha ne vo tamm kollet ganin.

12.

Setu ar gentel da denna
Euz an histor merket ama,
Histor ar siboer burzuduz
Ioa bet alaouret gant Jezuz.

SONJEZONOU MAD

Peb hini en deuz he groaz da zougen. Skanv eo evit an hini he doug a galon-vad ; eur zamm pounner evit an hini ne ra nemed he stlenja.

* * *

Pedomp ha greomp kement a zo en hor galloud : Doue n'hon dilezo ket.

* * *

Dont a ra ar boan d'hon skei : diouallomp d'en em glemm. Sellomp endro deomp, hag e velimp kalz tud pounnerroc'h ho foan evit hon hini.

* * *

Implijomp mad an amzer roet deomp gant Doue. Dont a rai marteze eun devez hag a garfemp kaout eun heur dirazomp evit en em brepari da vont d'ar bed-all.

Le Gérant : BOZEC.

Kemper, e ti DE KERANGAL, mouller ann Eskopti.